

# Qwerz savet en memor d'an dud bouzet war lestr Sant-Philibert

085\_01\_2010\_0472  
JPB-EA-06536  
206413\*\*

## Gwerz savet en memor d'an dud beuzet war al lestr SANT-PHILIBERT d'ar 14<sup>ved</sup> a viz Even 1931

Ton : KER-18

I  
Kenvroïz eus a Vreiz-Izel,  
Dont 'ran adarre d'ho kervel  
Evit silaou eur ganaouen  
'Meus rimet gant kals a anken.

II  
Alies 'meus grët tro ar vro,  
Dreist-holl eun nebeut amzer 'zo,  
A dost hag a bell diouz ar gér  
'Meus kanet dre bep sort amzer.

III  
Goude distruj dour ar c'hreiste  
Ilis Plougoven warlene,  
Ha maleuriou bras Konkarno  
E meus baleet meur a vro.

IV  
Met bremen, gant kalza c'hlac'hар,  
Pa neus ken war hon taol douar,  
E teuan da c'houlen skoazel  
Digant holl zent koz Breiz-Izel.

V  
Da zont da harpa va fluen,  
Ma kavin ar wir sklerijen,  
Da ziskleriea d'ar Vretonec  
Ar c'holl braz zo bet en Naoned.

VI  
D'ar zul, parzeg a viz even  
Aet d'ober eur bournamenaden  
War lestr anvet Sant-Philibert,  
A grenn-dost da gér Sant-Nazer.

VII  
War bemp-kant e oant partiet  
Mintin mat a gér an Naoned.  
Vit tremenn ar bras eus an de  
Barz en enezen Noarmoutier.

VIII  
Da vont, ar weach 'oa bet brao,  
Met, siouaz l'ar mor en em za,  
Kement ne oa ken a voyen,  
Kaer a oa esaat derc'hel penn.

IX  
O tistrei, etal Sant-Gildas  
Al lestr, barz e fons ar mor bras,  
A zo bet aet en berr-amzer ;  
Pebez glac'hар d'o zud er gér.

X  
Pa glevhont ar c'helou spontus,  
O oaint rentet ken malevirus,  
Chommet o zud e kreiz an dour  
Heb n'helle den d'o zikour.

XI  
Kriz a oa klevet o c'hlemmou,  
Bugaligou, tadou, mammou,  
Priejou nevez dimezet,  
Holl nemet eiz int bet beuzet.

XII  
Gwelit 'ta 'l lestr Sant-Philibert,  
'Neus gret, siouaz, kalz a vizer,  
'Lezel en fons ar mor distur  
Tud en o brasa plijadur.

XIII  
Pevar-c'hant-hanter, pe war-dro,  
'Lerer, deus kavet o maro  
Hep konta ar vugaligou  
'Oa c'hoaz war barlen o mammou.

XIV  
D'ar re a zo bet soveteet,  
Souetomp ar gwella yec'hed,  
Mar teufont d'en em gonsoli  
Demeus ar sort merzerenti.

XV  
Ma teuy ar gonsolasion  
Da ezetaat pront o c'halon  
Ha da chom gren 'pad peill-amzer  
Goude kement-all a vizer.

XVI  
Hogen gwelit, va c'henvroïz,  
'Zo kalz a dud en eur stad trist,  
Kemeromp peurz én o foanioù,  
O sikouromp 'n o ezommou.

XVII  
Rak ar blanedon 'zo kalet,  
Siouaz, en bro ar Vretonec,  
Ar mor, gant e fallagriez  
A ra maleuriou aliez.

XVIII  
Nag a bet gwech 'teu ar sord fall  
D'ober glac'hар da gement all,  
Rak 'nomp ket c'hoaz evit miret,  
Deus dour, na kurun, na luc'hed.

XIX  
Dreist-holl, Breiziz, tud an Arvor  
Kouls er mene evel er mor,  
Tud ar c'heriou ha war ar mèz,  
Truez demeus an dudou kez,

XX  
A zo hirio oc'h hirvoudi  
Gant dienez bras en o zi,  
Poaniet barz en pep sort feson  
Gant trubuilou ha ran-galon.

XXI  
Silaouomp eta o c'hlemmou,  
Greomp d'ezo aluzennou,  
Breudeur omp holl war an doz,  
Kouls er joa evel er glac'hар,

XXII  
Hervez hon galloud hag hon stazi,  
Mez, deuomp holl a galon vad,  
Karomp, greomp vad d'hon mese,  
Tre ma vefomp war ar bed-mez.

XXIII  
Rak hini 'hanomp ne oar lenne,  
'Pez a verk deoump ar blanedon,  
Met dre ma tremenn an deyoy,  
Ar miziou hag ar blavezioù.

XXIV  
A pa deufer en toull ho tor  
Deuit gant eur galon digor  
Da zigemer gant karante,  
Sikouromp an eil egile.

XXV  
Ha neuze, holl e vemp laouen  
Hag ar vuez, berr da drement,  
Rak hon poaniou a zo dister  
Kichen tud kez Sant-Philibert.

XXVI  
Diskitar werz man, penn-da-ben  
Sentit demeus skrid va fluen,  
Ha sur 'oun, ar wir Vretonec  
Deuio maioc'h d'en em garet.

XXVII  
En hon pedennou, barz er gér  
Pedomp Aotrou Sant-Philibert  
Ma vez ar gwir avokad  
Vit an dud beuzet en e vag.

XXVIII  
Goulomp, en amzer da zoned  
Ar peoc'h etre ar Vretonec,  
War vor, kouls vel war an douar,  
Demeus hon traonien a c'hlac'hар.

XXIX  
Rak ar vuhez, meurbet 'zo berr.  
Buan e tremenn an amzer,  
A greiz-holla 'vez diskaret  
Ar c'hrenva a zo war ar bed.

XXX  
Goulenomp en eur finissa,  
Ar Baradoz vijt an dud-man ;  
D'an eiz 'zo chommet en buhe ;  
Ar yec'hed ha prosperite.

Emil GALLIC, kaner brezonek, PLOUGONVEN.